

CANTIK

EN ENOR D'AN ITRON VARIA AR SCLERDER.

Voar ton : *Santes Anna.*

Drindel santel, prôsternet diraoc'h d'an daoulin,
Me ho ped da rein sicour, d'ho servijer indig.
Da gomposi eur c'hantiq en gloar hac en enor
B'an Itron Varia ar Sclerder guir vam hön Redemptor.

Gwerc'hes glorias Vari, dec'h e n'em adressan,
Obtenet din ar memor ewit gallout riman ;
Da donet da disclerian, en toutes ar gristenien,
Peguen bras eo ho callout, dirac ar Souveren.

Itron Varia Sclerder, obtenet din ar c'hras,
Da donet da bublia dan oll, bian a bras
Ar graço, ar faverio a recevomp bemde,
O tonet do hinvoquin, Rouannes an Æle.

Nombr bras a belerinet a ve gwelet bemde,
Dierc'hen, ho fen en noas, ho tonet ho pede,
Evit ho trugarecat, Rouannes an Evo,
Dre moc'heus hin preservet a gals a dangerio.

Dre ho craç hag ho merit hag ive ho pouar
E ret nombr a viraclo er mor hag en douar
Q'ment a deü d'ho ped n gant gwir devotion
Oll e vezont soulaget en ho affli-xion.

Gwelet so meur ha hini, dilour ha divoto,
Ho fen gant-he en noas, en corf ho rochedo,
Pob a ciergen gant-he, a goar gwen allumet,
Ho tonet da visitan ar Werc'hez biniguet.

Pa harijont er Sclerder he hint bet daoulinet
War ben ho daoulin noas dirac dor ar porchet
Da saludin ar Werc'hez deus ha greis ho c'halon
D'ha vean ho freservet dre he frotection.

Ober ha rejont teir zro oar benno ho daoulin
Ho trugarecat Doue hac ar Werc'hez divin
En creis ar mor perillus d'ho bean preservet ;
Peneverdoc'h Gwerc'hez sacr, e wamb brema beuet.

Pa c'haruas ho zroïo, e c'hint ed er porchet,
Ar c'hloc'h e hunan da zon a zo bet commanset ;
Hac e n'em gavas zoëset cals ha dut er c'hontre,
Ma diredjont da welet petra oa ha nevez.

Difunet voe ar sacrist gant e amezeien
Da digueri ar chapel ma teujent da antren :
Pelerinet oa beno ho defoa c'hoant
Da rein d'ar Werc'hez Vari donezon ha present.

Pa deus roet ho fresant, e c'hint bet daoulinet
Dirag imajar Werc'hez, gant enor ha respect,
Ho tout d'e zrugarecat a greis ho c'halono,
An dour oar ho daoulagat, beuet en ho daëro,

N'on get ewit recitan oll ebars en antier
Ar miraclo ve bemde en chapel ar Sclerder !
D'arn mud, d'arn all, d'arn bouzar, a d'arn all impotent
Ma elfent dont a galon ho deus soulajamant.

Bean zo grougue devot a zo bet gwel dretet
Gant priejo quen malin, tud foll a revoltet !...
Ho deus pedet ar Werc'hez deus a greis ho c'halon
Hac a boe ho deus bevet ebars en union.

Groague, esec'h, tud iaouanq, tud a heb qualite,
Supliomp ar Werc'hez Vari da gad ouzimp true ;
Rac ne el den ignorin, m'ar en eus eun tam noad,
Neo bet sicouret gant-hi en eur fesson benag.

Ar Werc'hes a se eur vam a consolation,
Heus clêvet, eus ar chagrin, a peb affection.
Peb hini en e ezomp, er fesson me feder,
E heo bepret truezus en andret ar perc'her.

Eun den a Pleumeur-Bodou, Modes Remont hanvet.
O hober eur vareaj ebars ar Biguedet,
W'e surprenet gant ar mor, ma cargne oar nean
Neur plaç danjurus bras, d'aro da berissan.

Oar veq ar Run eo savet, gant cals dimeus a boan,
Oa a pu-pre d'am eur vent d'eur-goloen oenan ;
Ar mor dindan e voto prest da vean beuet,
An Itron Varia Sclerder en neussan preservet.

Eun al deus a Pleuveur, eun osac'h a fesson,
O vont da droc'han bzin da enes Aganthon,
O vont re abret en hent, a zo bed surprenet,
Nombr a dud a oa gantan, e gar hac e gueseq.

Ar re oa ho chareat na voient quet an doare
Hac a gweas re izel, ma c'hent gant ar mare
Crog an eil en eguile deus ar re voa er c'har
O suplian ar Werc'hez d'ho derc'hel oll oar var.

Ar c'heseq a ben ar fin n'a ellent quet neuial ;
Eun den e oa ho clêvet a n'e oll ho crial :
Gwerc'hez glorias Vari, m'ho ped om preservet
E c'heomp da berissan ama tud a loënet.

A greis ma veont ho crial ar Werc'hez d'ho sicour,
Ho deus santet ar c'heseq, ho sevel oar an dour,
Hac e c'hint bet p'reet, a drugare Doue,
An dud hac ar c'heseq, nemert unan a n'e.

Dont a eure an den-man deus a greis e galon
En miraclo da di'r Werc'hez en tro procession ;
Conduin ra nezi betec an oter vras,
Hac eno oar e zaoulin en n'e zrugarecas.

D'an Itron Varia ar Sclerder e roas eur present,
D'ar bevien ne oar den peguement a arc'hant !
Ter zro a ra d'ar chapel, e n'eur dont da welan
O compren caëran miraclo e voa groët evitan.

Deus a guichen ar Sclerder e oa ed eur buguel :
Gant e vam da wit bleut deus ar vilin avel ;
Ma crogas an elviner dindan e chaqueden,
Ma eure gant ar vilin ar buguel eun dro gren.

E vam a gommanç crial pa oëlas e buguel :
Preservet ma inoçant, emei, Gwerc'hez santel ;
Pa goëas e diredas e n'eur c'houerzin ont,
Yac'h a dispos preservet gant ar Werc'hez Vari.

Suffisant eo invoquin an ano a Vari,
M'ar groet gant attantion evit plijout dezi,
Oh ! sur e vo exocet dec'h ho pedenno mad,
Dre ma c'heo e c'hredit quen bras dirac e Mab.

Eun den iaouanq a Plouber, a driveac'h via oajet,
Zo bet pevoar via antier privet deus ar gwelet :
Laquet e oa evitan eun ofern er Sclerder,
M'en deus dre c'hraç eun Doue recevet al lumier.

Pa oa ar beleq ho vont er gonsec ration
E laras an den iaouanq gant joa en e galon :
Ma zad quen scler a biscoas me a voël ma Zalver,
Oar vrec'h e vam, ar Werc'hez, en tu deo d'an oter.

E dad p'an eussan clevet, a lar en eur welan :
Trugarequeomp Doue, ma buguel, e mean,
Dimeus eur miracl quen braz zo groët en hom andret,
Moc'heus dre c'hraç ar Werc'hez recevet ar gwelet.

Ebars en puns ar Werc'hez eur buguel oa couët :
Quement den a voa presant en crede decedet
D'ar Werc'hez glorius Vari e trojont ho offranç,
Ma w'e caet ar buguel, hep na droug nag offranç.

Eur plac'h demeus an Nargoat, ne nonquet e hano,
A voa o vont gant e zad da bean e otro :
Ma losjont en ty eun den deus a voël santimant,
Hac a sonjas ho lac'han, a laëres ho arc'hant,

Ar plac'h pa deus bed clêvet voat ho lac'han e zad,
A n'eum voëstas d'ar Werc'hez gant galon vad.
Dre eur prennestic bian e c'heo bed sortied
Gant cals demeus a eston zioullan ma deus gallet.

Gwerc'hez glorius Vari, p'o c'heus ma freservet,
Me a mo jonz a c'hanoc'h en tre ma vin er bed,
Me a iel d'ho pardon evit ho bisitan,
Dre ma c'heus groet em hefer eur miracl ar brassan.

Ober a eure moyen da vont da di ar mæ,er,
Bars en e dillad tien, dindan an ol amzer.
A pa arias eno, voa digasset dezi
Eur gadeur evit toman, a dillat da voisqui.

Declari eure eno, dirag cals a desto,
Ar suit deus ar malheur hac ar circonstanço,
E n'eur scuil cals a daëro gant ar glac'har d'e zad.
Otro Doue, emezi houman zo calonat !...

En de warlerc'h a beure e partias ar mæ,er
Da di an torfetourien da laquat ho 'hemer.
E maïnt brema er prïson, herve ma meus clêvet,
A Doue a bardono an anaon decedet.

Eur plac'h deuz a Vuguelez, a baros Penvenan,
Abandonnet en eur vag gant e breuric bian,
En mor, betec e banden, ebars en goël danger,
Ma n'ont voest-jont d'an Itron Varia ar Sclerder.

Cat int en tre an daou dour, gant ar besqueterien
Hac a sicour a n'e da donet da antren
Ebars en nod Tafeac, bars en peb surete,
Dre c'hraç ar Werc'hes Vari, Rouanez an Æle.

Piou benag a zo devot d'an Itron Varia,
Nag er mor nag en douar na deui da berissa ;
Rac bean deus ar puor digant Zalver ar bed
D'ober nombr a viraclo ebars e n'om andret.

Couscoude zo christennien na reont van abed ;
Na demeus a bedenno, na deus ofiç abed ;
A pa vent bars en risq, prest da goll ho bue,
Neuse pedont ar Werc'hez da sicour a neze.

Penos vefomp sicouret, gant Doue, ar Werc'hes,
Evit dont d'ho hofiansi a reomp allies,
Lec'h donet d'ho fedi deus a greis om c'halon,
Mar fel dimp cad ho graç ho benediction.

E n'om laqueomp eta dindan ho protection
Ar Werc'hez glorius, deus a greis om c'halon,
Rac c'hi a zo eur vam vad, a gar e bugale,
Hac a c'houtenno pardomevidomp noz a de.

Tud iaouanq, tud dimeet, tud coz a bugale,
Reservomp e n'om c'halon bepret ar chastete
Pihini zo tensor deus ar preciussan
Da baesanti d'ar Werc'hez en on heur divoëzan.

An ini a zo sujet da eur vis fal benag,
Pedet ar Werc'hez Vari gant eur galon vad
Da donet d'ho preservin deus ar viço ze,
Rac ar Werc'hez dreïst bep tra a gar ar burete.

Piou benag en e galon a garo ar Werc'hez,
A vo devot d'he gouëlio, da vonet da goves,
Da gommunion en stad vad, an de deus e fardon,
A zo assur da gad e benediction.

Da anter-est er Sclerder e ve groet ar pardon.
Eno e vezo gwelet, en dro ar procession
Eun nombr bras a viraclo, hag hi guisquet en guen,
O hasistan ar Werc'hez gant peb a ciergen.

Eur procession ar c'haëran a ve goëlet enno
Entre ar c'hroajo arc'hant hag ar vatimancho ;
Drapoio a baniëro, merc'het guisquet en guen
Pere ve galvet bep bla da donet d'ho douguen.

Gant cals a vagnificanç hag a devotion
E ve douguet ar Werc'hez en dro ar procession
Gant peder flac'hic yaouanq ag ign guisquet en guen,
Peder all en ho c'hefer gant peb a ciergen.

Pa ve achu an offiç, a finisset an dro.
E teu tud ar miraclo da lazan ho golo,
An dour voar ho daoulagat, a stouet d'an daoulin,
Euo trugarecad, Gwerc'hez sacr a divin.

Ebars en Perros-Guirec e medi ar chapel
E neur plac'h huel meurbet, apercevet a bel,
Ispicial er mor bras gant ar verdaïdi
Eo eur merq a sicour, pa deuont de fedi.

Piou benag a antreo en porchet ar Sclerder
A deus dor an illis a voelo on Salver,
Voar vrec'h e vam, a Werc'hez an Itron Varia,
Ar pevoar Evangelist, sant Per, santes Anna,

Nim a neus bet, Perosis, eur c'hras particulier
Da gaet e nom farous Mari ; mam d'hon Zalver ;
Supliomp i a galon, a deuomp de fedi.
Ac e vefomp consolet pa vefomp en annui.

An nep a neus recitet an ol miraclo man
A houlen eus ar Werc'hez, quent evit finissa,
Ma vezo ganti choaset a douez ar peherien,
A renquet en touez an nombr deuz e servigerien,

Gwerc'hes glorius Vari, c'hui eo ar boquet roz
A sicour ar beherien da vont dar barados,
Pedet o mab evidomp ma veomp sicouret
Da vont ganec'h assambles da balez an Drindel.